

# CHANSON NEVEZ

## VAR SUJET AN EFFERRIEN

### PRINCIPALAMANT VAR SUJET AN TOCQUOU

Me a fel din chan va etat,  
An hini am beus ne de quet mad ;  
Mes pes seurt micher a darre  
A fel did da guemer goude ?  
Me a fel din beza tocquer,  
Ounes e ar guenta micher.

Espicial ar bla-ma,  
Ounes so eur vicher ar gouela.  
An niver bras a sistrujer  
Eus an tocquou e peb cartier,  
Lod esa gand an dour ac an avel ;  
Affer an tocq ne bad quet pel.

Couscoude hini a goues en tan  
Ennes a souffr ar muya poan,  
Car an tocq paour a so nos de  
En danjur da gol e vue.  
Espicial tocq an effer chistr  
Ennes a so bepret en risq.

Couesan a ra divar e ben  
Gouec'h en tan, gouec'h er vouillen ;  
A vichou an tocq a ve beuset,  
A vichou al e ve deveit,  
A vichou al e log er mes en nos,  
A vichou al e ve paquet clos.

E mesq an tan ac al ludu  
Antro nos nen deus nemet eun tu  
Evel deus eur gasden,  
Evel a soug ar vourc'hichen.  
An tocqueryen mer goar er fut  
A el efa meur a chopinat.

Ja espicial ar re vad  
Pere a var trei a penceillat  
Ober tocquou a liva re al  
Reparin an deffoutou fal.  
Ne quet avoalc'h ober tocq nevez,  
An hini cos so da benseillat ives.

Evit na vouio den eus a be du  
E vo great anesan ludu.  
Mar deus distruj var an tocquou,  
Credet e herru goas malheuriou :  
Col a ret o henor, o yec'het,  
An outro Doue a offaucet.

Lacquat o tud en paourante,  
Goude c'hoas offanci Doue.  
Ma no peus leve ne badint quet pel,  
Oc'h enchi re ty Yan Vourdel.  
Carsa ra ar pintac ar verren,  
E listribuer cals a voyen.

Ebars an hostaliri nos de  
Ne bado quet pel o tanvez.

Ma n'o peus yec'het gant Doue  
Trugareca ente eus a se.  
Effa guin ardent a guin guen,  
An drase a vago dec'h poan ben.

Cousquet er mes alies en nos  
Allas ! an treou-se tout so caos.  
D'ar mel da siminui  
A d'ar goad en ho hisili,  
Mar doc'h den brao a puissant  
A gorf a visac'h den vaillant.

O vont re dan hostaliri  
C'houi dei da neur diffiguri ;  
No peso na grac na feçon  
Mar doc'h troed re dar boesson.  
Ma no peus mignonet consideret  
O fachri eo a dennet.

Nan, gant den na viot caret  
Ha quemeret evit eur strolien,  
Nemet ar re a vo guenec'h o effa,  
Hi eo o mignonet brassa  
A hoas a alies ma ret goud  
Piou en deffe muya galloud.

Mar doc'h fur a comportet,  
En no marvailhou den reglet,  
O heneba an hostaliri  
C'hui a seu da siresonni ;  
Gant den ne viot silaouet,  
Pa se dal ar pez a leveret.

Ar paour ques meoyer oc'h effa.  
Ennes ne espero netra.  
Ac a ve ben noas a diarc'hen,  
A disso caer e groc'hen,  
Ma elfe caout eur gouenec  
Eur bannac'h a renq c'hoas da gavet.

Ma na ve quet arc'hant ganta  
E c'houlen credit quer brao a tra :  
Den brao on a den brao e vin,  
Hostis ebet ne goll ganne ;  
Ma oll arc'hant a ya gante  
A bepret e ven en o dle.

Sonjet eta, paour quez meoyer,  
Ar viser o deus da dud er guer.  
Te so en daffarn nos de,  
Da dud er guer er baourante,  
Oc'h usa an tan ac ar goulou  
Oc'h hortos a hanout da sont en dro.

Bepret en aoun ac en nec'hamant  
Retec gout en peseurt santimant  
Evide c'hoas pa seui dar guer,  
Pe vi douc pe vi en coler.

Grena a reont bian a bras  
Gant aoun da santout poues ar vas.

Car deus an humeur ma vezi  
Te a rei ganto tro an ti,  
Te rei de gant da gomzou  
Lampad buon dreist an treujou,  
Te rei de eb compassion  
Loja dianveas ar pignon.

O veza quen didruez  
Ous da c'hrecq a da vugale,  
Te rei de eben tersuen  
Loja dianveas ar planquen.  
Compren a beguement a dourmant  
E coz ar guin hac ar guin-ardant.

Ouma er fat so eur froesen  
Deus em valeuryou eseo y ar pen ;  
Houma eo mam an oll viçou  
Ebars e pevar c'horn ar vro.  
Gret, me o ped, reflexion  
En neubet breman var son.

Var bep articl am beus expliquet  
Me o ped da bos o speret,  
Ac e velfet em ber amzer,  
A me am beus lavaret deoc'h guyer.  
An ini en deus great ar son-ma,  
Mo ped, na fachel quet outan.

Car evit ema d'ho quelen,  
A blich dezan cals ar veren ;  
Quitibunan bian a bras  
A blij deomp-oll lipad an tas.  
Allas ! dre forz mont er yago  
Eve gouasquet or hostessiou.

Cetu ase an occasion  
Am beus da gomposi eur son,  
O cavet eun tam anoudegues  
Ebars en buez ar meoyer quez,  
O caout anoudeguez vad  
Ebars en buez Yan Gorfat.

An neb en deus ar son-ma  
A so dibourve a bep tra,  
So eur paour quez mar deus nicun  
Alies en fot a vutun ;  
Natif eo deus a Dreguer,  
A c'hui en hasso en Quemper.

Noa quet deut anter ar sisun  
Oa manquet desan e vutun,  
Ac en plaç dounet da fumi  
Ean so deut da gomposi  
A da rima eur ganouen  
Var sujet an efferien.

# Chanson var sujet ar Livitennou.

D'an drivoac'h dus ar mis-ma me meus occazion,  
Da occupiu ma speret, da ganan eur chanson.  
Eur re benag a hoerzo o clevet an nezi,  
Mes demeus ar c'hoste al me em bo fachiri.

Ar sujet deus ma chanson eo an dallidigues,  
A so aru quen commun en toes ar merhet ques.  
Dar gloar a dar vannite y a so n'en livret,  
En renq an dimezellet e maint ari guisquet.

Me o ped, potret yaouanq, pa hoet da vale,  
Da vellet o mestrezet me o hevertis en se,  
Da vousqua eur liviten, pa seot d'o guellet,  
Rag potret ar mestreno, ne dint tam respetet.

Mar gariet en o zi, gouisquet prop gant vestren,  
Hui a vo diguemeret vel eun distoladen,  
A mar chomet da goanian, patates o pezo  
En pot caet eur liviten guisquet vel eun otro.

Ariout unan var varc'h, eur liviten gantan  
Ar plac'h yaouanq dus ar zall a voello a neza.  
Mont a ra de diguemer gant cals dus a respet,  
Dre ma en deus eur liviten a vezo regallet.

Ar plac'h yaouanq a lavar d'ar mevel dus an ty :  
Laquet prest marc'h an otro ebars ar marchosi,  
A casset e vallizen bars er gambr huella ;  
Fenos on bo an enor d'e gaet da goania.

Quement a vo ebars en ty deus a servicherien  
A vo o prepari coan da bot e liviten ;  
Darn a laza poncinet, darn al perdriet,  
Guellet peguen bras e ze brema beza livitenec.

Guellet a ret, tud yaouanq, gant tout o oll moyen,  
Ne doc'h netra estimet en pot ul liviten ;  
Chanch a gostum a vo ret, me ro dec'h alli,  
Vit beza oel repetet gant ar merhet a di.

Guelet o heus scleramant caera dispign a re,  
Pa dari pot e liviten en o zi da valle :  
Poncinet a perdriet, guin coz en ur guir ber,  
Hac a bep sort liqueurio, bonbonio vit decer.

Pa ve pot e liviten partiet en e dro  
Neuz var an bansion, calomni a vezo ;  
Ur re benac a santoi an dispign a vo gret,  
Ur bansion deffripou, patates a vo hepret.  
Ur rumat all a zo c'hoas a zoug livitennou,  
En deus cals education, mes neubeut a vado,  
A voar parlant dre brincip cals a sqiant gant-se ;  
Hoas e pretantont cavet merc'het o deus leuve.

Brema o deus esper cavet eur garg benag,  
A noter, pe avocat, a so etatcho mat ;  
Laret a rei de bried ebars en comzo ber :  
Ret a vo guerza leuve da gaet carg a noter.

E bried a lar deza : Me zo contant a ze,  
Me ro dec'h otorite da verza ma leve ;  
Pa o po ur garg a noter, me vo neuze itron,  
Hac a vezo respetet gant an oll e c'hanton.

Guel eo gani angagi an anter ma mado,  
Vit caet un turnier douar gant e oll vestreno.  
Brema ni a vo eurus, ni vezo dizourci  
Hac an arc'hant a gueo bemde bars en on ty.

Brema pot e liviten gant e garg a noter  
En em livras d'an deboch, ne voa quet pel amzer.  
Bemde e ma o verza leveyo an itron ;  
Chetu y rentet malhurus, ne neo quet hep rason.

An itron a gri brema demeus a boes e fen :  
Chetu me cren ruinet gant pot e liviten,  
Dispriget voa guannime gues zal pot e vestren,  
Deut e a ben gant e arc'hant da brema ma moyen.

Rac-se ta, merc'het yaouanq, quemeret a hanon  
Rac me a vo an exempl d'an oll ebars er vro.  
Hoant bras em boa da veza guisquet en roben,  
A c'hraç caer vo din brema caet cotillonon.

Ma fried livitennec allo brema monet  
Da honit e dam bara d'ar parc da labourat,  
A dispen e liviten vo ret mat deza hoas  
Da ober un tam brago d'e vuguel so en noas.